

SON AR C'HAFE



A musical score for a song in G major (one sharp) and 2/4 time. The score consists of six staves of music. The lyrics are written below the notes. The lyrics are: "A Gas-tell Paol da Lan-nu-on A Ger-ne da Oue-lou Ez eus bet sa vet meur a zon Di-war an e - va-chou E - vi-don Keit ha ma ve-vin Me gav d'in e la rin Ne-tra ne blij d'in-me 'Vel eur ban-ne ka-fe Ne-tra ne blij d'in-me tel eur ban-ne ka fe!"

I

A Gastell-Paol da Lannuon,
A Gerne da Ouelou,
Ez eus bet, savet meur a zon
Diwar an evachou;
Evidon keit ha ma vevin,
Me gav d'in e larin;
Netra ne blij d'in-me,
'Vel eur banne kafe!

DISKAN

Netra ne blij d'in-me
'Vel eur banne kafe.

II

Eur vamm pa glev he bugel kaez
O ouela 'n e gavell,
Gand eur banne kafe gant laez
A ra d'ezan tevel.
Ha neuze diou vouezig vihan
A unan a vouskan.

III

Ha pa 'z eas Fanch ar paotr faro
Da welout Jannig vrao,
E laras d'ezi: « Du-man 'zo
Chistr ha gwin leun ar c'haol! »
Met Jann a respontas a-benn
D'ar c'haez den he sonnenn:

IV

En tiegeziou pinvidik,
Ema bet a viskoaz,
Ar c'hiz da ginnig kafe rik,
Warlerc'h ar predou bras;
Aotroned hag intronezed
A glevet o laret:

V

Ar paour ivez, mesk al ludu,
En eur pod pri faoutet,
A domm eur banne kafe du
Araok mont da gousket:
Hag hep sonjal 'n e baourente,
'N e wele ec'h hunvre:

VI

Kenta labour ar martolod
Kerkent m'eo dihunet,
Eo redek da zifenn e lod
Eus an dour du karet,
Hag eur wech leinet mat, d'e dro,
e laro, hep distro:

VII

Ar c'hafe 'zo eul louzaouenn,
Hep par dreist pep hini;
Ha n'hellan ket en eur zonenn,
Kaer a-walc'h he meuli;
Va son a vefe kalz re hir,
Pa 'z eo gwir, en eur gir:

VIII

Me a varvo ivez m'oarvat,
Evel pep krouadur,
Ha m'ho peus c'hoant neuze, tud vat,
D'ober d'in plijadur,
C'houi 'verko war va bez dister,
Doun ha sklaer, en eiz ger:

DISKAN DIWEZA

Ma z eo eur paotr an hini a gan:
Netra d'ezan n' blijje
'Vel eur banne kafe
Ha ma 'z eo eur verc'h an hini a gan:
Netra d'ezi n' blijje
'Vel eur banne kafe.

Evnig Penn-ar-C'hoad.

